

## Renabl kefredioù-yezh brezhoneg (*adwelet 18-12-14*)

### Komz gant unan bennak ha kontañ

*Glas* : adalek PS, *Ruz* : adalek MS-GS, *Du* : adalek ar CP

	Kefredioù-yezh <i>Gouest e vo ar skolidi da ...</i>
1	Lavaret ez eus un dra bennak.
2	Lavaret petra eo un dra bennak. Lavaret peseurt doare a zo gant un dra bennak.
3	<u>Lavaret pet tra a zo en ul lec'h bennak.</u>
4	<u>Lec'hiañ un dra bennak er spas pe en amzer.</u>
5	<b>Kaozeal eus petra en deus unan bennak pe petra zo gant unan bennak.</b>
6	<b>D'en em brezantiñ pe da brezantiñ unan bennak.</b>
7	Lavaret penaos emañ kont gant unan bennak.
8	Komz eus ar pezh en deus graet unan bennak.
9	<u>Lavaret pelec'h eo bet unan bennak.</u>
10	<b>Komz eus ar pezh a vo graet.</b>
11	<u>Lavaret petra a ra unan bennak pe un dra bennak.</u>
12	Lavaret petra a vez graet gant unan bennak pe un dra bennak.
13	<u>Lavaret petra emañ unan bennak oc'h ober.</u>
14	<b>Komz eus ar pezh emañ unan bennak o vont da ober.</b>

15	Komz eus ar pezh zo ret pe arabat ober.
16	Reiñ urzhioù.
17	Reiñ o soñj pe o santimant diwar-benn un dra bennak.
18	Lavaret petra a fell da unan bennak ober, pe petra en deus c'hoant da ober.
19	Kaozeal eus petra en deus ezhomm unan bennak.
20	<u>Kaozeal eus ar pezh a c'hell bezañ pe eus ar pezh a c'hell bezañ graet.</u>
21	<u>Goulenn ober pe kaout un dra bennak.</u>
22	Kaozeal eus petra a zo mat dezho pe eus petra e vezont kontant da ober.
23	Boñjouriñ ha lavaret kenavo.

**1, Gouest e vo ar skolidi da lavaret ez eus un dra bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>Komzer 1 : Pet a zo ? Komzer 2 : Daou a zo.</p> <p>Komzer 1 : Petra a zo war ar skeudenn ? Komzer 2 : Ur gador a zo.</p> <p>- Dec'h e oa skol.</p> <p>- Warc'hoazh e vo amzer fall.</p>		

**2, Gouest e vo ar skolidi da lavaret petra eo un dra bennak. Lavaret peseurt doare a zo gant un dra bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>Komzer 1 : Petra eo ? Komzer 2 : Ur wezenn (uhel) (eo).</p> <p>- Un neizh (eo).</p> <p>- Setu ur madig. Ur madig melen eo.</p> <p>- Bihan eo al lapin gwenn.</p> <p>Komzer 1 : Petra eo an dra-mañ ? Komzer 2 : Ur ruilhenn (vihan) ( eo).</p> <p>Komzer 1 : Pe liv eo ar volotenn-mañ ? Komzer 2 : Glas (eo).</p> <p>- Te zo farsus ! Buzhugenn vihan !</p> <p>- Me zo kreñv (evel ur marc'h) !</p>	<p>Komzer 1 : Petra eo ? Komzer 2 : Ur ribot eo, evit ober amann.</p> <p>- Tresad un ti eo. Ar gambr a zo a-gleiz.</p> <p>- Un ti bras eo gant ur gegin en traoñ hag ur burev en nec'h.</p>	<p>- Bras eo ar pod a zo e-kreiz.</p> <p>- Kilian zo brasoc'h eget Ewen.</p> <p>Komzer 1 : Pehini eo al loen brasañ ? Komzer 2 : An olifant eo al loen brasañ.</p> <p>- Ar yarig zo finoc'h eget al louarn.</p> <p>- Klas ar re vihan zo bihanoc'h evit ar c'hlas-mañ.</p>

**3, Lavaret pet tra a zo en ul lec'h bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>Komzer 1 : <i>Pet bugel a zo er gêr ?</i>            Komzer 2 : <i>3 bugel a zo er gêr.</i></p>	<p>- <i>2 vugel a zo er gêr hiziv ha dec'h e oa 3.</i></p> <p>Komzer 1 : <i>Pet plas a zo er park-kirri ?</i>            Komzer 2 : <i>60 plas a zo er park-kirri.</i></p>	

**4, Gouest e vo ar skolidi da lec'hiañ un dra bennak er spas pe en amzer.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- <i>Amañ emañ !</i></p> <p>Komzer 1 : <i>Pelec'h emañ ar volotenn ?</i>            Komzer 2 : <i>N'ouzon ket pelec'h emañ.</i></p> <p>Komzer 1 : <i>Petra zo e-barzh ar pod ?</i>            Komzer 2 : <i>Ul logodenn wenn zo e-barzh ar pod.</i></p> <p>Komzer 1 : <i>Pelec'h emañ ar baotred ?</i>            Komzer 2 : <i>Er c'hlas emañ ar baotred.</i></p> <p>- <i>Ar madigoù a zo er pakad.</i></p> <p>- <i>Dec'h e oa al lun.</i></p> <p>- <i>Hiziv emañ ar meurzh. Meurzh zo hiziv.</i></p>	<p>Komzer 1 : <i>Pelec'h emañ Julie ?</i>            komzer 2 : <i>Etre ar gador hag an tapis emañ.</i></p> <p>Komzer 1 : <i>Pelec'h emañ klas Annie ?</i>            Komzer 2 : <i>Etre klas Yann ha klas Julie emañ klas Annie.</i></p> <p>- <i>An heol a oa dirak ar viskoulenn.</i></p> <p>- <i>Er goañv e vez skorn war an otoioù a-wechoù.</i></p> <p>- <i>D'ar 6 a viz Mae emañ deiz-ha-bloaz Enora.</i></p>	

**5, Gouest e vo ar skolidi da gaozeal eus petra en deus unan bennak pe petra zo gant unan bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Din eo.</p> <p>- Boutoù ruz zo ganti.</p> <p>Komzer 1 : Petra zo gant mamm Meudig ? Komzer 2 : Un tamm bara zo ganti.</p> <p>- Tri bouch bihan he deus ar gazeg.</p>	<p>- Un tok du a oa war e benn.</p> <p>- Kanetennoù a oa ganto.</p> <p>- 4 pezh 2 € en deus.</p>	

**6, Gouest e vo ar skolidi d'en em brezantiñ pe da brezantiñ unan bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>Komzer 1 : Piv out ? Komzer 2 : Ewen on. 7 bloaz on. E Sizun emeon o chom.</p> <p>Komzer 1 : Peseurt anv az peus ? Komzer 2 : Fiona eo ma anv.</p> <p>- Ur ramz eo. Bras-kenañ eo.</p> <p>- Rozenn eo. Ur plac'hig vihan moutig eo.</p> <p>- Blev melen am eus.</p>	<p>- Setu bugale ar c'hlas. 12 paotr hag 11 plac'h a zo.</p> <p>- Setu ar bleiz. A-wechoù e vez drouk met alies e vez jentil.</p> <p>- Léonie on. Ar c'hezeg a blij din abalamour e kavan int loened brav.</p>	<p>- Ar bisig kollet eo. Da gentañ en doa naon met a-benn ar fin en doa kavet laezh da evañ.</p>

**7, Gouest e vo ar skolidi da lavaret penaos emañ kont gant unan bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p><i>Komzer 1 : Mont a ra mat ?</i>  <i>Komzer 2 : Ya, mont a ra mat.</i></p> <p><i>Komzer 1: Pelec'h ez peus poan ?</i>  <i>Komzer 2 : Poan-benn ha poan gof em meus. Riv 'meus.</i></p> <p>- Skuizh on.</p> <p>- Mat eo. N'eo ket kalz a dra.</p> <p>- Me zo laouen hiziv !</p>	<p>- C'hoant kousket em eus peogwir n'em eus ket kousket an noz paseet.</p> <p>- Poan-gof em eus bet e-pad an noz.</p>	

**8, Gouest e vo ar skolidi da gomz eus ar pezh en deus graet unan bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Treset em eus an heol.</p> <p>- Lammet en deus.</p> <p>- Galoupet em eus buan !</p>	<p>- Treset em eus ur c'hazh bremaik peogwir e plij din al loense.</p>	<p>- Lammet o deus dreist ar c'helc'h met kouezhet int.</p>

**9, Gouest e vo ar skolidi da lavaret pelec'h eo bet unan bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Me zo bet er sirk.</p> <p>Komzer 1 : Pelec'h out bet ? Komzer 2 : E ti Mamm-gozh (on bet).</p> <p>- Er sinema eo bet Axel.</p>	<p>- Me zo bet er sirk gant ma familh disadorn da noz.</p>	<p>- Ni zo bet er sirk disul peogwir e oa ma deiz-ha-bloaz.</p>

**10, Gouest e vo ar skolidi da gomz eus ar pezh a vo graet.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Lennet e vo an destenn.</p>	<p>- Greun a vo lakaet e-barzh ar pod bihan warc'hoazh.</p>	<p>- Petra a vo graet pa vo echu ar boelladenn ?</p>

**11, Gouest e vo ar skolidi da lavaret petra a ra unan bennak pe un dra bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>Komzer 1: Petra a rez d'al lun da greisteiz ? Komzer 2 : Debrñ a ran er c'hantin.</p> <p>Komzer 1: Petra a ra ar plant er jardin ? Komzer 2 : Kreskiñ a ra (ar plant).</p> <p>- D'ober petra ?</p> <p>- Me a zebr er gêr ha te a zebr er c'hantin.</p> <p>- Harzhal a ra ar c'hi.</p> <p>Komzer 1 : Peseurt loened a gousk kalz ? Komzer 2 : An arzhed a gousk kalz.</p> <p>- Galoupat a ra buan.</p>	<p>- Ne gomprenan ket.</p> <p>- Ne welez ket ?</p> <p>- Er goañv e kousk e-pad an deiz.</p> <p>- Labourat a reont asambles.</p>	<p>- Klask a raimp touchañ re ar strollad all. <b>(sport)</b></p> <p>- Mont a raent d'ar skol war o zroad.</p> <p>Komzer 1 : Petra a ri goude ? Komzer 2 : Goude e lennin an eil testenn, an hini a zo en traoñ.</p> <p>- Alies e lavare sotinioù met farsus e oa.</p> <p>- Klask a rin jediñ ma-unan.</p>

**12, Gouest e vo ar skolidi da lavaret petra a vez graet gant unan bennak pe un dra bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Penaos e vez lavaret ... ?</p> <p>Komzer 1 : Petra a vez debret gant al lapined ? Komzer 2 : Karotez a vez debret ganto.</p> <p>- Al logod a vez debret gant al lern.</p>	<p>- A-raok ar vakañsoù e vezan laouen atav.</p>	<p>- Gwechall e veze graet tan en oaled evit poazhañ boued.</p> <p>- Savet e veze kestell war ar maez.</p>



**13, Gouest e vo ar skolidi da lavaret petra emañ unan bennak oc'h ober.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>Komzer 1 : Oc'h ober petra emañ Arzhig du ? Komzer 2 : O prenañ bara (emañ).</p> <p>Komzer 1 : Oc'h ober petra emaut ? Komzer 2 : O tresañ un oto ruz (emaon).</p> <p>- O c'hoari gant kamaraded emañ.</p> <p>- Me zo oc'h echuiñ ma labour.</p>	<p>- Ar plac'hig a zo o lammat dreist al linenn.</p> <p>Komzer 1 : Petra emañ Enora oc'h ober ? Komzer 2 : O skrivañ gant ur c'hreion ruz emañ.</p>	<p>Komzer 1 : Petra emaac'h oc'h ober ? Komzer 2 : O jediñ evit kavout respont ar problem emamp.</p> <p>- Ni a zo o kontañ war ar sklentenn abaoe pell.</p>

**14, Gouest e vo ar skolidi da gomz eus ar pezh emañ unan bennak o vont da ober.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Emañ o vont da c'haloupat.</p> <p>- Emaon o vont da skrivañ ar respont.</p>	<p>- Emaint o vont da c'hoari asambles.</p>	<p>- Emaomp o vont da glask kompren an destenn da gentañ.</p>

**15, Gouest e vo ar skolidi da gomz eus ar pezh zo ret pe arabat ober.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Ret eo echuiñ bremañ ?</p> <p>- Ret eo tresañ.</p>	<p>- Arabat skrivañ dindan ar skeudenn ?</p> <p>- Ret e vo skrivañ brav peogwir e vo diskouezet d'ar re all.</p>	<p>- Ret e vo deomp lammat dreist ar c'helc'hioù evit mont betek ar penn.</p> <p>- Ret e oa labourat buan setu n'em eus ket skrivet mat a-benn ar fin.</p>

**16, Gouest e vo ar skolidi da reiñ urzhioù.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Ro din ar gartenn.</p> <p>- Ro din daou asied.</p> <p>- Deus amañ !</p> <p>- Kae kuit !</p>	<p>- Laka an tamm paper gwenn a-zehoù.</p> <p>- Na rez ket trouz !</p>	

**17, Gouest e vo ar skolidi da reiñ o soñj pe o santimant diwar-benn un dra bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Me 'blij din Spot. Farsus eo.</p> <p>- Trist eo an istor.</p> <p>- Ne blij ket ar ganaouenn-se din.</p> <p>Komzer 1 : Penaos az peus kavet al labour ? Komzer 2 : Aes eo.</p> <p>- Diaes eo an dra-mañ.</p> <p>Komzer 1 : Petra a blij dit ? Komzer 2 : Tresañ a blij din.</p> <p>Komzer 1 : Petra a oa plijet dit ? Komzer 2 : Penn kentañ ar film.</p> <p>Komzer 1 : Petra a gavez mat ? Komzer 2 : Chokolad a gavan mat.</p> <p>- Brav e kavan an dresadenn.</p> <p>- Plijout a ra din kanañ.</p>	<p>- N'on ket sot gant ar saozneg.</p> <p>- Kasaüs em eus kavet ar film.</p> <p>- Ne gavont ket mat pizza.</p> <p>- Plijet on bet peogwir e oa brav ar muzik.</p> <p>- Araok e plije din tresañ met ne blij ket din ken.</p> <p>- Dilun e oan bet dipitet gant ar pezh-c'hoari.</p> <p>- Emaon o vont da gaout plijadur.</p>	<p>- Da gentañ e plije din met a-benn ar fin ne blij ket din ken.</p> <p>- Ne gavomp ket mat brikoli.</p> <p>- Plijout a rae ar foot din.</p>

**18, Gouest e vo ar skolidi da lavaret petra a fell da unan bennak ober, pe petra en deus c'hoant da ober.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>Komzer 1 : Petra 'peus c'hoant da ober ? Komzer 2 : C'hoari gant Léa (am eus c'hoant da ober).</p> <p>- Me 'meus c'hoant da begañ an dra-se amañ.</p> <p>- N'en deus ket c'hoant da lenn.</p>	<p>- Kabellig ruz a fell dezhi mont da welet he mamm-gozh evit reiñ amann dezhi.</p> <p>- Ne felle ket dezho didroc'hañ diouzhtu.</p> <p>- Bremañ em eus c'hoant d'ober ar boelladenn.</p>	<p>- Ne blijjo ket dezho.</p> <p>- Me am boa c'hoant da skrivañ ar respont da gentañ.</p>

**19, Gouest e vo ar skolidi da gaozeal eus petra en deus ezhomm unan bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- Ezhomm en deus ar sac'h.</p> <p>- Ezhomm he deus dilhad brav.</p> <p>Komzer 1 : Petra 'peus ezhomm ? Komzer 2 : Ezhomm em eus jedoueroù all, mar plij.</p> <p>- Me 'meus ezhomm da vont d'ar privezioù.</p>	<p>- Ar plant o deus ezhomm dour.</p> <p>- Ezhomm em eus kreionoù evit tresañ.</p> <p>- Ezhomm em eus ma levr matematikoù met ne gavan ket anezhañ.</p>	<p>- Me em bo ezhomm eus ma c'haier da gentañ hag eus al levr goude-se.</p>

**20, Gouest e vo ar skolidi da gaozeal eus ar pezh a c'hell bezañ pe eus ar pezh a c'hell bezañ graet.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- N'eo ket posubl.</p> <p>- E c'hell bezañ.</p> <p>- Bremañ e c'hell mont d'ar gêr.</p> <p>- Ne c'hellan ket ober ma labour.</p> <p>Komzer 1 : Petra a c'hell ar yer debriñ ? Komzer 2 : Greun (a c'hell ar yer debriñ).</p> <p>- Ne c'hell ket bezañ gwir.</p> <p>- N'en deus ket gallet respont.</p>	<p>- Ne c'hellont ket echuiñ.</p> <p>- Ne c'hellan ket kavout ar respont kentañ setu ne c'hellan ket ober ar rest.</p> <p>- N'em boa ket gallet ober ar boelladenn peogwir n'em boa ket komprenet.</p>	<p>- Ne c'helle ket Gwenn Erc'h dihuniñ ken.</p> <p>- Bremañ e c'hellomp mont war-raok.</p>

**21, Gouest e vo ar skolidi da c'houlenn kaout pe ober un dra bennak.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>- E c'hellan mont d'ar privezioù ?</p> <p>- E c'hellan mont da c'hoari bremañ ?</p> <p>- E c'hellan kaout ur c'hreion ruz, mar plij ?</p> <p>- E c'hellez sikour ac'hanon, mar plij ?</p>		

**22, Gouest e vo ar skolidi da gaozeal eus petra a zo mat dezho pe eus petra e vezont kontant da ober.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p>Komzer 1 : Mat eo dit ? Komzer 2 : Ya, mat eo din</p> <p>- Me zo kontant da ziskouez ma labour.</p> <p>- N'on ket kontant d'ober an dra-se diouzhtu.</p>	<p>- N'eo ket mat dezho.</p>	

**23, Gouest e vo ar skolidi da voñjouriñ ha lavaret kenavo.**

Live 1	Live 2	Live 3
<p><i>Komzer 1 : Mont a ra mat ?</i> <i>Komzer 2 : Mont a ra mat, mat-tre, disteñget ...</i></p> <p><i>- Kenavo, kenavo ar wech all, ken warc'hoazh ...</i></p>		

Taolenn-dielfennañ al liveoù 1, 2 ha 3

	Live 1	Live 2	Live 3
<b>Ar gourioù</b>	- kentañ gour unan ; - eil gour unan ; - trede gour unan.	- kentañ gour unan ; - eil gour unan ; - trede gour unan ; <b>- trede gour lies.</b>	<b>- an holl gourioù</b>
<b>An amzerioù</b>	- stumm gant skoazell ober en amzer-vremañ ; - displegadur dibersonel en amzer-vremañ ; - amzer-vremañ kevrennek ; - stumm "emañ o + vb" / "zo o + vb" ; - stumm "vb-et + vo" ("Lennet e vo ...")	- stumm gant skoazell ober en amzer-vremañ ; - displegadur dibersonel en amzer-vremañ ; - amzer-vremañ kevrennek. - stumm "emañ o + vb" / "zo o + vb" ; <b>- amzer da zont "emañ o vont da ..." .</b> - stumm "vb-et + vo" ("Lennet e vo ...") <b>- displegadur personel en amzer-vremañ ;</b> <b>- vez + vb-et en amzer-vremañ</b>	- stumm gant skoazell ober en amzer-vremañ, <b>en amzer dremenet hag en amzer da zont ;</b> - displegadur dibersonel en amzer-vremañ, <b>en amzer dremenet hag en amzer da zont ;</b> - amzer-vremañ kevrennek ; - stumm "emañ o + vb" / "zo o + vb" ; - amzer da zont "emañ o vont da ..." ; - Stumm "vb-et + vo" ("Lennet e vo ...") - displegadur personel en amzer-vremañ, <b>en amzer dremenet hag en amzer da zont ;</b> - vez + vb-et en amzer-vremañ <b>hag en amzer dremenet..</b>
<b>Ar verb bezañ</b>	eo, zo, ez eus , emañ	eo, zo, ez eus , emañ , <b>oa , vo, vez</b>	eo, zo, ez eus , emañ , oa , vo, vez
<b>An araogennoù</b>	da, eus, war, dindan, e-barzh, e-kichen	da, eus, war, dindan, e-barzh, e-kichen, <b>dirak/a-dreñv, a-raok/goude, gant/hep, tost da/pell da, en nec'h/en traoñ, etre, a-zehoù, a-gleiz, dreist</b>	da, eus, war, dindan, e-barzh, e-kichen, dirak/a-dreñv, a-raok/goude, gant/hep, tost da/pell da, en nec'h/en traoñ, etre, a-zehoù, a-gleiz, dreist, <b>en dro da, e-kreiz, a-dreuz</b>
<b>Kompleksifiañ ar frazennoù</b>		ha, met, evit, abalamour, peogwir, setu, morse, a-wechoù, alies, atav, bremaik, dec'h, warc'hoazh, deizioù ar sizhun,	ha, met, evit, peogwir, setu, <b>ha-hag a, en ur, pa, gwechall, warlene, ar bloaz a zeu, da gentañ, goude se, a-benn ar fin</b>



<b><i>Kefredioù-yezh merket e glas pe e <u>ruz</u> :</i></b>	
Live 1	fin ar skol-vamm
Live 2	fin ar CE1
Live 3	fin ar CM2

**Remerkoù :**

- N'eo ket peurglok al listennad kefredioù-yezh-mañ ;
- Al livioù n'int nemet merkoù. N'eo ket strizh an traoù.
- Kefredioù all a c'heller labourat warno : komz eus ar pezh a oa bet graet / lavaret penaos e vefe unan bennak pe un dra bennak, lavaret petra a rafe unan bennak pe un dra bennak ...